

## KIS-545 – Loen ha den

(GE – 03 07 97)

*da Kida, Safo, Boup, Yourka, Fraou hag ar re all*

Petra zo etre an den hag al loen ? D'an aters lieskemeraddek-mañ ez eus bet roet respontoù diseurt.

Ar Viloniezh a renk an den, an Homo sapiens, e kerentiad an Hominideged, iskerentiad an Hominineged en ur ser gant ar Chimpanze, ar Gorilh hag an Orang Outan.

A-ragenep, prederourion Kornog a lak un troc'h krenn etre mab den hag an natur : dister eo ar c'hammedoù etre mein, plant ha loened e-skoaz an islonk etrezo holl hag an den. Un hengoun skoueraet gant DESCARTES ha SARTRE a ra eus al loened emgefreaded ijinek hep mui. AAB ha LL a gont din respont MALEBRANCHE d'ur c'heneil feuket ouzh e welout o lopañ war e gi : “Ne ra forzh, ur mekanik n'eo ken.”

Koulskoude, etre ar c'hi hag e vestr e vez, mar gran gant an termenoù boas, fealded ha karantez — dilesoc'h zoken eme dud 'zo a-berzh ar c'hi eget a-berzh e vestr — ha den n'eo evit lavarout ha santadoù ar c'hi zo a anien disheñvel diouzh santadoù an den. “Ne vank dezhañ nemet ar gomz”, a glever alies ivez a-zivout ki pe gazh. Denekaet bepred fromus pe emdouell an denervannañ ?

Un denesadur all ez eus. Ur standilhon anezhañ a embannis gwechall e stumm ur pennad kaer gant F. J. J. BUYTENDIJK<sup>1</sup>. Pennaenn an denesadur-se zo deskrivañ doareoù ar bezañ den (an dended) diouzh un tu, doareoù ar bezañ loen (al loended) diouzh an tu all hag o c'heñveriañ war glask pezh a c'hell bezañ boutin etrezo. Hevelep holc'h, mar amprest hentenoù an Anadennoniezh, a rank distremen ar bevennoù merket da houmañ gant HUSSERL : he durc'haat a rae etrezek an emouezañ trehontel

---

<sup>1</sup> “Moneadur an anevaled — Heñchidigezh fenomenologek d'al loeneneoniezh”, hervez F. J. J. BUYTENDIJK, Kelenner war an eneoniezh hollek e Skol veur Utrecht, *Preder*, nevezamzer 1958. (Diwar vont, merkomp al lamm en deus graet brezhoneg ar preder abaoe pergont vloaz.)

tra ma vezer degaset gant studi al loened war an durc'hadur kontrol ha betek kuitaat domani an emouezañ end-eeun.

Unan eus amkanioù an Anadennoniezh eo deskrivañ penaos e vez amparet ergorennoù an emouezañ ha se hep kuitaat maezienn an emouezañ, eleze en ur lezel a-gostez pep rekour d'ar Vevoniezh pe d'ar Vredoniezh arnodel. Kemeromp da skouer an *arouez*. He amparadur (Al. *Konstitution*) a empleg argantvout, eleze neptuiñ un ergorenn drael bezant, kantvezet, e gounid un ergorenn ezvezant (sl. La-01, p. 68). Hogen amparadur an ergorenn drael (*gourzhergor*, Al. *Gegenstand*, sl. La-01, pp. 63 hh.) he unan a empleg trehontiñ maezienn enmanus an emouezañ, kantvout o vezañ dec'havaelañ un ergorenn drehontus. Hevelep trehontiñ zo kement hag un troc'h etre ur *gouzrec'h* (Al. *Subjekt*) evel lec'h maezienn enmanus an emouezañ hag ar bed (an draelezh) trehontus d'an emouezañ. Merkomp daou gemeradur all eus Al. *Subjekt*, Gl. *sujet* : a) an den oc'h emouezañ ouzh forzh pe ergorenn, enmanus pe drehontus ; kentoc'h eget *gouzrec'h* e lavarer *ergorer* er c'hemeradur-mañ ; b) ar gouzrec'h n'eo ket hepken evel desellet a-dal da nep ergorenn met evel goubaret diouzh nep ergorañ : an *dangorenn* eo, keal n'en deus ket e lec'h en Anadennoniezh huserlek evit gwir o vezañ ma ezlaka an ergorañ, eleze an emouezañ (sl. KIS-511, La-11, p. 23). Pa reomp anv eus *an troc'h dangor-ergor* e vukomp enta ouzh un troc'h n'eo ket etre gouzrec'h ha bed pe etre ergorer hag ergorenn met etre an emouezañ, empleget gant nep ergorañ, hag ur “ rannbarzñ ma vez ezvezant an ergorañ, a'm eus anvet *anemouez* <sup>2</sup>.

Alies hon eus bet tro d'ober anv eus al luniad *anemouez* ez eo treug an dec'havaelañ arhent, deskrivet evel o hepkoriñ maezienn an emouezañ hag o tifourkañ e maezienn ar fiñval (sl. KIS-345, La-08, pp. 345-346). Hevelep anaout an arhent 'm eus anvet *kedouezañ* — keal a heulier e zivrazadur adalek Da-64, p. 26 ha La-01, pp. 57-58<sup>1</sup> betek KIS-345, La-08, pp 340 hh. Notomp : gant ar c'hedouezañ e tigejer e

<sup>1</sup> Br. *ergorad* a reer eus an ergorenn enmanus : “«soñjal a ran e Loeiz» ; an ergorad n'eo ket Loeiz, hogen pezh a soñjan pa soñjan ennañ ; [...] an ergorad eo pezh a ergorer pa ergorer ouzh udb.” (Da-64, p. 63).

<sup>2</sup> Arveret da gentañ en un diarsell freudek a-gevenep da *diemouez* (sl. Da-64, p. 51, GBLF. ¶ 948), e kavas *anemouez* un domani arver piaouel a-geñver gant an arhent (sl. KIS-381, La-09, pp. 279 hh.)

<sup>1</sup> E notenn draoñ ar p. 58 e raen eus ar *c'hedouezañ* ar c'hevatal eus Gl. *conscience non thétique*. Ur fazi oa : an emouezañ hep dodañ zo un emouezañ a ra diouer dezhañ an distro warnañ e-unan, ur gouzout na oar ket e oar. Lakaomp e ve an kez emouezañ hep dodañ an nesañ

mab den ur mod anaout a denn d'an anaout loenel. Al loen ivez ne emouez ket, ne ampar ket ergorennoù na, seul gent a se, arouezioù. Kent mont pelloc'h avat ha keñveriañ anaout<sup>2</sup> loenel ha kedouezañ denel e vo mat deskrivañ hemañ spisoc'h.

Un diforc'h a bouez zo etre kedouezañ hag emouezañ. *Emouezañ* zo reiñ ster da ergorennoù amparet dre o didroc'hañ war un dremmwel ; an deil a sellan dirak va frenestr, sourr va urzhiataer a selaouan, pajenn al levr a douchan d'he zreiñ zo kemend-all a ergorennoù ma stian va evezh warno gant frankiz bras pe vrasoc'h. Ouzhpenn se, diraez didenn 'm eus e'm emouezañ pa na vez tra aesoc'h eget ober un distro warnon, emouezañ ouzhin me oc'h emouezañ (distro a zo, evel a ouzer, poent loc'hañ an hentenn anadennoniel). Evit ar *c'hedouezañ* zo un anaout e-maez diraez an emouezañ, a se a anavezer dre un hentenn ameeun dre ziansavelañ e dreugoù. Eus ar re-mañ ne stader nemet an derou hag an disoc'h. Diwar arstalegezh ar c'houbladoù derou-disoc'h ez anreer e vez rakstignet an treugoù. O rakstignadur zo pe enganet, evel da skouer an denañ gant ar vagadell diwar ma touch ar penn bronn he jod, pe arzeuat, evel da skouer ar stardañ gant ar blenier a-ouez d'ar goulou ruz. Pep kedouezañ a ampleg d'e zerou ur saviad klok, da skouer bezañ magadell ha kaout naon, bleniañ ur c'harr, tostaat d'ur c'hroazhent ha bezañ distroet e evezh ; e-touez an amplegadoù e vez unan o c'hoari evel delanker — a zo pe stekiñ ar penn bronn ouzh ar jod, pe degouezhout dirak ur goulou ruz — a reer anezhañ an *arhent*. Disoc'h pep kedouezañ zo ur real, stagañ da zenañ, pouezañ war ar starderez. Denañ ha stardañ zo dezho ur ster, met hepken evit an arseller oc'h emouezañ outo. Evit gouzrec'h ar c'hedouezañ, anemouez outo pa c'hoarvezont, a lavarer a ro dezho *u* *ÿ* e ser ar real renet.

Amañ ne c'hellomp ket lezel a-gostez un arbennadenn, houmañ : hag ar c'hedouezañ, treug delanket gant un arhent hag o tisoc'h e rezh ur gwered arstalek, ne ve ket direadus da arc'hwel ur stignadur alvezel ? Daoust ha n'eo ket bet diskouezet ez eus hevelepted ouziadoniel etre arhent bevedel hag arhent alvezel (sl. KIS-365, La-09, p. 152) ? Neoazh, un arsell stadegel a ziskouez n'eo ket *arstalek* an adanv a zere ; tro 'm eus bet c'hoazh da verkañ ez eo *peurliesañ* e c'hoarvez ar realoù diwar arhent (sl. KIS-355, La-09, p. 58). Darvezout a ra d'ar vagadell nac'h denañ, d'ar blenier mont hebiou d'ar goulou ruz. Adarbenniñ a rafed e tarvez ivez d'ar stlennijinenoù teukañ,

---

d'ar c'hedouezañ (kantet hemañ e-maez maezienn an emouezañ), ur c'hedouezañ n'eo mui met un emouezañ endeo. Da reizhañ ivez p. 58, l. 5 : “[...] e c'horrekaan, ent *anemouez*, eleze ent kedouez [...]”

<sup>2</sup> An erdal brasañ a viran d'an termen *anaout*, sl. KIS-381, La-09, p. 279 n1.

<sup>3</sup> A-zivout digejadur keal prederel an *eul*, sl. KIS-057, La-04, pp. 35-37 ; KIS-345, La-08, pp. 339 hh. ; GBLF. ¶ 1193 □ ; GSTL. ¶ 2254 ; KIS-381, La-09, pp. 278 hh.

kuitaat an treug. Hogen kammadoù an ijinenn a vez bepred a orin alvezel, e dalc'h daremoug un treug all pe falladur un amred. En eneb, hep ezlakaat degouezh un daremoug pe ur falladur alvezel er bevedeg, e c'hell ivez ar realezh diankañ diouzh treug ar c'hedouezañ da heul un emell eeun pe ameeun a-berzh an emouezañ. Keit ma chom distroet evezh ar blenier ha ma ne emouez ket hemañ ouzh ar goulou ruz ez arc'hwel e nerveg evel un ijinenn. Met lakaomp ez adstag da emouezañ ouzh e saviad blenier — evit leterc'hañ : e tap krog er baol en-dro, e tiskourr ar blenier emgefreak — , e tevredo pe chom a-sav pe er c'hontrol trozañ ha tremen. N'eus diskiblezh alvezel ken evit ober meiz war hevelep degouezh. Heñvel dra, ar vagadell a c'hell nac'h denañ dre benn ur c'henniñv, kentañ erzerc'hadenn an tennderioù emouez-diemouez, andisplegadus dre zarvezadoù un treug alvezel. E dibenn dezrann, ar real diwar arhent, pell a vezañ un ober skouer, zo un degouezh *bevennat* eus ar vonedigezh — spisaomp evit bezañ dik : *bevennat* e kement ha ma'z eo real digenvez, goubaret diouzh ar peb all eus ar realezh ; e lec'h all (sl. KIS-345, La-08, p. 337), o harpañ war labourioù GOLDSTEIN & ROSENTHAL, e'm eus bet tro da zeskrivañ an treugoù diwar gedouezañ evel ur c'hondoniad “fiñvoù eulel” o vont diouzh an dro gougevan ouzh ar realoù emouez, an treug diwar arhent o vezañ dezhañ div naoz c'hallus : pe dibennañ en ur real anemouez pe difourkañ e maezienn an emouezañ.

Hag ergerzhet hon eus a-walc'h an dended evit gallout nesaat gant frouezh d'ur studi geñverel eus al loended ? Marteze nann, rak un arvez hepken eus ar realezh denel hon eus strivet da sklaeriañ. Sellout neuz he delioù n'eo ket a-walc'h da anaout ur wezenn. Daou arvez hon eus bet tro da zigej er merzhout ha dre se en emouezañ : ar c'hantouezañ hag ar c'hantaezañ (sl. KIS-381, La-09, p. 278 hh.). Aesat tra eo plediñ gant ar c'hantouezañ pa c'houl emouezañ ouzh an emouezañ, hervez un distro naturel koulz lavarout. Netra diaesoc'h avat eget komz eus ar *c'hantaezañ*. Penaos anaout pezh a zo o c'houstennañ an anaout e doare ur sabr o lanviñ e diabarzh an delioù. An aozerion a ra war-dro ar c'hantaezañ a ya dre al leterc'hañ peurliesañ ha nesoc'h e vez o frezeg d'ar varzhoniezh eget d'ar brederouriezh. FREUD hepken a gredas sevel ur meni Fizik oc'h ebarzhiñ kealioù kementadel evel an *Trieb* (al luzad), an *Drang* (ar bount), an *Energie* (ar gremm) — evit emgavout a-benn ar fin er savlec'hiad ragenep evel ma test e glozadur brudet eus 1932 : “Boudoù gwengelek eo al luzadoù, meurdezus en o andesaveladur” (sl. GBLF. ¶ 1024).

#### AL LOENDED HERVEZ ROLF KÜHN

War an dachenn, ne c'haller diraez ar gantaezelezh nemet o tremen dre al luniadoù kantouezel emañ stag outo, gwell : ez eo ar sabr anezho. Drezo e c'hounez an

desaveladur n'he deus ket dre natur. Plijadur 'm bez o tañva gwin, oc'h eñvoriñ daoulagad kaer, glac'har o klevout ez eus aet ur c'heneil da anaon : ne vez na bliz na poan n'o defe un dremm, ur sintr kantouezel, FREUD a lavare n'eus kantaezad na ve stag ouzh un derc'had (zoken mar bez rikladurioù, treuzlec'hiadoù etre an daou were). Brasañ degasadenn ar bredelfenner kentañ e voe deskrivañ “armerzh” espar ar sabr galloudek-se a vez o rezhiennañ ezhommoù boniek hon bezout hag oc'h anadiñ e rezh trivliadoù evel doubleür bividik hon emouezadoù. E sklerijenn an emouezañ e vez an nerzhoù feuls doñvaet, finaet, sevenaet, n'eo ket hep stourm, hep kenniñv nag enkadenn — an neurozioù ! A bouez eo merkañ e tezev bepred FREUD ar c'hantaezañ a-geñver gant ar c'hantouezañ, eleze gant an emouezañ : n'eus ket kantaezadoù diemouez ; dindan par an emouezañ n'eus nemet “eginoù kantaezadoù n'o deus ket gallet diorren” (sl. GBLF. ¶ 31). Da zeskrivañ ar stuz en deus en diemouez ar pezh a vo kantaezadoù en emouez e tilez FREUD ar sell bredoniour evit mont dre ul lavar brizhfizikel ha komz eus “ gremm dierë ha gremm ereet ” (sl. GBLF. ¶ 407). Anat eo e chome an deskrivadur d'ober, ma n'eo ket e-ser ur vredoniezh, ac'hoel gant hentenoù an Anadennoniezh. Hag, e gwir, meur a brederour o deus pleustret war an argraf. En notenn-mañ e rin meneg eus ur pennad nevezembannet gant Rolf KÜHN a-zivout al loended hag ar bevañ. A-raok mont d'an destenn, e rin div evezhiadenn :

~ an eil diwar-benn an daou hent a gemer Rolf Kühn da ziraez e zanvez : a) dre “zeskrivadur dassellek” degouezhioù 'zo eus ar realezh denel nes evit doare da realezh al loen — pezh a c'hell reiñ dimp tro da vont tre a-benn ar fin en dachenn kemennet gant titl an notenn-mañ ; b) dre “ an dodad anadennoniel o c'hoarvezout a haeriñ ez eo al loended arstal eidetek an emhaeziñ (*Selbstaffektion*)<sup>2</sup> trehontef e kement ma'z eo ar vezañs dezhañ e unan eus ar bevañ”; merkomp diwar vont, pa skriv Rolf KÜHN : “emhaeziñ a ra ar bevañ e

<sup>1</sup> Rolf KÜHN, “Animalität als transzentaler Begriff”, *Alter*, 3, 1995, pp. 347-364 ; tr. gl. “Vie et animalité”, *Études Phénoménologiques*, 23-24, 1996, pp. 225-245.

<sup>1</sup> Er ster a ro HUSSERL da Al. *eidetisch*, a'm eus kinniget ivez Br. *gwezadel* da gevatal dezhañ (sl. KIS-534, La-11, p. 182).

<sup>2</sup> Dre an termen-mañ e tro Rolf KÜHN Gl. *auto-affection* a intent drezañ Michel HENRY perzh diazez ar bevañ, distro warnañ e unan ; un distro a gaver ivez evel perzh diazez an emouezañ ; e par an anemouez netra ne brou e c'hoarvez gant ar “gouezañ” ha furoc'h eo tremen gant “haeziñ”. An arver a roan amañ d'ar stirann *-haez-* a glot gant he bezañs e-barzh *kantaezañ* ha *ketaezañ* ; arver nad emañ ket kontrol betek gouzout da arverioù prederel all ar verb *haeziñ*.

<sup>3</sup> Al. *transzendental* zo arveret amañ gant ar ster a roe ar Skolastiked da La. *transcendentalis* “oc'h adanviñ an ardaoladoù o tereout ouzh an holl veziadoù, evel ar bout, ar gwir, ar mad”. Amañ e reer eus an *emhaeziñ* un ardaolad boutin d'an holl vevion.

kement ma'z eo ezhomm anezhañ e unan”, ez adkaver keal an *ezhomm* en deus ul lec'h bras ivez e preder Hans JONAS (sl. KIS-540, La-11, p. 217) ; eus e brederiadennoù war ar bevañ evelkent ne zalc'hin amañ nemet ar pezh a denn d'ar c'heñveriañ dended ha loended ;

~ eben war an dermeneg arveret gant an aozer ha prederourion all pa reont gant deveradoù diwar Al. *Affekt-*, Gl. *affect-* a-geñver koulz gant an emouezañ ha gant an anemouez : gwell 'm eus kavet na adkemer eno Br. *kantaez-* hag ober gant *ketaez-* (sl. KIS-381, La-09, pp. 279 hh.) en arverioù o tennañ d'an anemouez pe gant *anglev-* evit ar c'hemeradur boutin ledan (sl. KIS-381, La-09, p. 281 ; KIS-502, La-10, pp. 417-419). Heñvel dra, Al. *Leben*, Gl. *v* *i* *e* o vezañ kevatal gwech da Br. *buhez*, gwech da Br. *beved*, e ran gant Br. (*ar*) *bevañ* pa na vez ket digemmet pe digemmadus an daou generadur.

Evit Rolf KÜHN, emañ al loended bezant en dended evel diazez d'ar bevañ.

Mar bez hevelep loended voniek, ha hi « ene bev » hon bezout, ezkaelet peurliesañ diouzh maezienn hon emouezañ, ez eo peogwir omp boaziet da garzhañ diouzh hon anaout pe hon meizañ

kounael

1

<sup>1</sup> d'ul loended bev ennomp bepred.

Arzaeladus eo hep mar hevelep haeradennoù n'eo ket pa loc'hfent diwar an dodad end-eeun a ve da zienaat, met pa heptreugont atersoù na c'haller ket gwallegañ. E berr, e lavar Rolf KÜHN an dra-mañ : devezout (ac'hoel er ster strizh) ne ra ket al loen ; evit an den zo rannet etre devezout hag andezevout ; dre se, pezh a zo andezevout en den zo loended ; da anaout al loen, anavezomp al loended a zo ennomp. Penaos gouzout avat ez eo loended end-eeun a gavomp ennomp ur wech lakaet an devezout etre krommelloù ? Ne c'haller ket tremen hep savlec'hiañ da gentañ an argraf war e sol. Un afer a *goaliñ*, a *Doxa* e ster HUSSERĹ, zo amañ. Ar c'hoaliñ ez eo dodiñ

---

<sup>1</sup> Rolf KÜHN a ra amañ gant Al. *Memorial*, Gl. *mémorial* evit tremen hebiou da *Erinnerung*, *mémoire* termenou oc'h emplegañ an devezout ; alese kentoc'h eget dre *eñvor* pe *kounaenn* e troan dre *kounaell*, “furmadur” kounaat a ziraezer ameeun evel ur c'hounvaen. E lec'h all e skriv :

“ Kounaell an ezhomm-loended ez eus anezhi enta. Hon c'horf eo en e gorfted he unan, eleze liammet difrailh ouzh ar bevañ evit amparañ e anien end-eeun e-barzh anc'hloaz (*Pathos*) e emhaeziñ.”

<sup>2</sup> Sl. KIS-501, La-10, p. 396.

ar bed liz dezhañ a adkaver e-giz un neudenn ruz e rezh dodiñ an hentez evel *alter ego*, e rezh dodiñ al loen evel gouzrec'h, evel *alterum subjectum*. N'eus arguzenn estreget houmañ da enebañ ouzh ar re a venn ober eus al loen ur mekanik hep mui. Diwar se, e rank an atersoù kantrat bezañ a neuz gant an hini a ra da skouer Michel HENRY :

“ Daoust ha luniad kentañ ar c'horf bev, ar c'horf loenel, zo bezant en eil luniad, ar c'horf denel, e rezh unan eus e elfennoù pe e rezh un diazez <sup>3</sup>? Evel a weler, ez eo douget ar prederour aostrian da vont dre an eil goulakadenn. Da ategañ e zibab e ren un ñeskri vadur dassellek ” eus erzerc'hadur al “luniad denel” e plegennoù eizhaek.

Nep anglevad stroñsus (*affektive Erschütterung*) trumm a zegas da goun dimp enta, hep arvar ebet, bezañs trebadus, tavek neoazh, ar bevañ a reomp van da zianaout. An efreiz, an aon, ar sebez zoken a ra din gourlammat, tec'hout pe chom pik ha krenañ. Bac'het on, kilhet gant ar from pe an angerzh, « o koll ar bed » dre benn hevelep hollvezañs ketaezel (*affektiv*) diwasket a-daol. Hag ul loen on neuze, eleze al loen-ardivink kartezeke sujet penn da benn da zamougoù ar beved ? [...] Da gentañ, gant barr ar from eo diarvar e teu a-wel un dangorelezh n'he deus ket ezhomm ken da harpañ war un erganad a rizh dassellek evel « e tezevan », rak eilrenk ez a mennoz ur me e-skoaz ar pezh a vuhezan evel un devoud boniek pe andoniek (*Urdatum, Urtatsache*), eleze an *ankouaat* nep ergorenn derc'het ha derc'hadus e gounid un unveziadezh vloc'hel ha digenvez war un dro. Ankouaat pep devez ezsavel dezgeriet a-zivout va « e tezevan / ez on » zo unan enta gant ar gounaell greudel (*Leibmemoria*) evel korf dangorel groñs. Hogen, evit doare, seurt ankouaat-kounaell hon nesa d'al loen o vevañ e pep mare en ur bezout er bevañ doareet gant hon lavar boas evel « hep devez ».

Deurusoc'h da'm meno an dezrann a ra Rolf KÜHN eus ur blegenn dibarek eus ar bevañ loenel.

An aneval, sellet kuit a zenervannañ, eleze en e anadennellezh piaouel e kement m'omp evit he lenn gant hon daoulagad denion, a vev o vorediñ ha n'eo nemet pa zeu un trouz pe ur bount diabarzh, an naon da skouer, da dennañ e evezh ma tivorfil a-daol trumm. Hevelep dihun sebezet en un doare a ra d'al loen kuitaat e « vremañ peurbadus » koulz lavarout hag a c'houlank

---

<sup>3</sup> Michel HENRY, *Philosophie et phénoménologie du corps. Essai sur l'ontologie biranienne*, Paris 1965, ademb. 1988, p. 8.

dezhañ ur fiñv penn gorrek pe ur jestr prim a c'hourlamm, o titouriñ e teu un dra bennak « nevez » da astaliñ e « emankouazh ». Fraezh e teu dangorelezh al loen enta da geñver un dihun en lak war e api.

Anzav a rankan eo diaes din treiñ skrid Rolf KÜHN, n'eo ket pa chomfe skort ar brezhoneg a-dal d'an alamaneg pe d'ar galleg met, er c'hontrol, pa rankan addezevout termenoù alamanek pe c'hallek 'zo evit dibab dezho ur c'hevatal brezhonek diouzh ster an destenn ha dreist-holl diouzh an dezzrannoù bet renet e brezhoneg en domani studiet. Da skouer, en arroud diagent e'm eus ranket prederiañ war geal "*Subjektivität* al loen". Dibabet 'm eus deverañ diwar *dangor-* pa hañval din bezañ an diskoulm nemetañ : luniet eo bet an termenoù *dangorenn*, *dangorelezh* e stern ur vredoniezh denel ha despizet evel 'ar gouzrec'h goubaret diouzh nep ergorañ " (sl. p. 280 diaraok) ; e se ez eo an *dangorelezh* rannbarzh al luniad denel an nesañ d'al luniad loenel a glasker aroueziñ. Evel m'hon eus gwelet, diwar ma tizarbenner an dodad o tiren al loened da drevnadoù alvezel, e teu d'un afer a *goalñ* ober anezho *gouzrec'hioù* ; diwar ma anreer an ezvezañs a ergorañ ganto ez a dister al lamm d'ober evit envel *dangorelezh* ar rannbarzh anezho ma tiwan o levez, o aon, o brouez, h.a.

Kenderc'hel a ra Rolf KÜHN da studiañ dihun (resisoc'h : *defrou* "dont war evezh") al loen hervez un hentenn o korvoiñ war un dro an diren huserlek hag an diansavelañ freudek.

*Piv* zo o tihuniñ amañ evit gwir ? Mard eo un emskiant o tamantiñ dezhi he unan en ur vannañ un dañjer war he amva, e ranker goulak-aat ur meni "me ragemouez" a imbrouder e warediñ : dre dec'hout, emzifenn, emvagañ, h.a. Nemet hon eus bet tro c'hoazh da ziskouez e c'hell an defrou bezañ ketaezel (*affektiv*) rik dre ar seurt stroñsadenn anglevat (*pathisch*) pe greudel (*fleischlich*) eus ar c'horf hon laka, ni denion ivez, da dremen rag-eeun eus ur stad en unan all kuit a dennadoù dre an dasselliñ hag an devredañ hentennek. A-walc'h eo menegiñ an emgannoù lid etre loened a un spesad evit kompren didro pezh zo e-barzh. Daou gorf loen o stourm an eil ouzh egile hep gloaz varvus ha zoken hep gloaz ebet, a vez o kenetrehaeziñ, maezienn werc'hel hevelep kenetrehaeziñ o vezañ ledanoc'h eget maezienn hon merzhout-ni. O welout e eneber, pep loen a ziawel endeo fiñvoù egile, e doare ma ra unan gantañ gwelout hag ersaviñ. Amañ n'eus ket lec'h d'ul lankad ma emskianter bezañ en arvar, evel ma c'hellomp gwiriañ hon unan er blegenn a vuhezomp bemdez o vale en ur straed verienus, ma hepkor pep hini stok ar re all hep emouezañ an disterañ ouzh pezh a ra.



Meur a boent zo aze. E monedigezh an tremeniad o leviata war ar riblenn ez adkavomp pezh hon eus deskrivet evel *kedouezañ* : an anaout o heptreugañ maezienn an emouezañ, o kemer war-eeun furm ur gwezhiañ. Rolf KÜHN ne lak kemm ebet etre loen ha den, displegañ a ra realezh al loen dre ar c'hedouezañ. Estreget se e teskriv defroù al loen evel un darvoud anglevadel, oc'h ober stad eus un doubleür a getaezañ d'ar c'hedouezañ. Ur gudenn all zo stignet : a-zivout an daou loen tal ouzh tal e skriv “*perzipieren sich gegenseitig in einer Wahrnehmung*”, a'm eus troet “kenetrehaeziñ , a'm be troet kenemzec'havaelañ” ken reizh ha ken dispis all. Un diaester zo aze, un diaester er geriañ a zo arverk un diaester er meizañ. Er par denel e teskrivomp daou vod d'an dec'havaelañ : ar merzhout pe kantvout, a zo savelañ ergorennoù trehontus, ar c'hedouezañ, a zo anaout anemouez dre ar realoù. Ar blenier ouzh e rod stur, an tremeniad war e riblenn, unan a zaou, pe a wel ent emouez pezh a zo dirazo hag a ren o monedigezh diwar o merzhidigezh, pe e gedouezañ a reont, e welout ” hep e verzhout, sentiñ ”anemouez ouzh arhentoù : e lec'h all emañ o evezh, eleze o emouezañ ha gantañ o c'hantaenzañ. Penaos intent avat an dec'havaelañ a-berzh al loen ? Hag ur “ sentiñ ouzh arhentoù ne ve ken ? Hevelep displegadur a rafe eus al loen d'ar muiañ un dangorenn gloz oc'h arc'hwelañ evit ar peb all evel ur robot.

Ur striv da gomepeañ ar skoilh a gaver gant prederouriezhoù ar c'horf. War an hent digoret ganto e kendalc'h Rolf KÜHN e zezrann.

En dihun trumm eus al loen, dec'hanet gant un ezhomm, koulz hag en e evezh uc'hañ da geñver e stourm ouzh ur c'hetpar pe un enebour, e vez ur meni

gougorfa

ñ

”

<sup>1</sup> a'n amgen pe a'n amva. An kez gougorfañ a ampar ur gouzout kentizhek ma "oar" drezañ ar c'horf ar pezh en deus d'ober pe, gwell : ar gouzout eo ar c'horf e unan e kement ma'z eo ur gwezhiañ o tapout krog en e c'halloud piaouel. E goueled ar gwezhiañ-se, e-barzh e anien diwel, n'eus derc'had ebet, ezsav ebet [...]. [...]

<sup>1</sup> Notomp e ra Rolf KÜHN gant an hevelep termen ha FREUD, *Einverleibung*. Er Bredelfennerezh ez eo ar gougorfañ “ur mod a zarempred ouzh ergerc'henn dezverkus eus ar bazenn c'henaouel” (GBLF. ¶ 593). Deurus e ve keñveriañ ar *gougorfañ eriuñellek* denel ha *gougorfañ naturel* al loen.

r

bedouezañ (*Lebenswissen*) empleget e dihun al loen ne zec'havael ket ur bed neptu pe ergorel er ster gouziedour, met ur bed korfpiaouekaet<sup>2</sup>.

Rekouriñ da geal ar c'horfpiaouekaat avat ne spir ket d'ober meiz war ur mod anaout loenel, a neuz gant an anaout (denaout-daznaout) denel. Ar bevedouezañ en ur bed korfpiaouekaet (KÜHN a ra gant *erdeinverleiblich*) ne spir ket da zisplegañ ez anavez ar c'hi e vestr pe ur c'hi all keneil dezhañ, rak n'o anavez ket hepken evel bleinoù eus ur vaezienn dialuskel (sl. KIS-433, La-10, p. 115), met evel gouzrec'hioù hiniennekaet, dezho hevelepted treadegel — nemet e rafed eus ar “bevedouezañ” un davarn spagnat mat da glenkañ kement devoud andispleget.

Emgrennañ a ranker da chom gant goulakaat. Gwirheñvelañ goulakadenn en degouezh eo e vez gant al loen un dec'havaelañ ar gouzrec'hioù all hag ar “bed na c'haller ket diren d'ur c'hedouezañ hevelep m'en saveler e par an den. D'ober meiz war ur seurt anaout loenel e ranker darbenn emañ gougevanet ennañ kedouezañ ha ketaezañ loenel evel m'emañ gougevanet kantouezañ ha kantaezañ denel er merzhout. Da aesaat al labour war ar c'houlakadenn e kinnigan envel hevelep gwezhiañ loenel ar *c'hedvout*, o lakaat anadiñ drezañ a) e gevelepted gant ar *c'hantvout*, b) e nesañvded gant ar *c'hedouezañ* hag ar *c'hetaezañ*. Arver ur seurt termen a aesafe d'ar yezh resis tremen hebiou d'ar bleupadoù a glever e bommoù evel hemañ : « Ar c'hi en doa merzhet e vestr » pe d'an daouskilfoù pa skriver : « Ar c'hi en doa “merzhet” e vestr. » Ur splet all e ve korvoiñ ar c'houlakadenn gevenep a ve bezañ ur *c'hedvout* denel, eleze un anaout dangorel pur ha koulskoude hiniennekaus.

---

<sup>2</sup> Gl. *corps-appropriation*, termen krouet gant Michel HENRY hag arveret gantañ, war un dro gant *savoir-de-la-vie* (*bevedouezañ*) en e levr *La Barbarie*, Paris 1987.